



© Estelle Destruhaut

Bugale Diwan Kastellin, skol bet digoret gant an hentad kevredigezhel er bloaz-mañ.

Hag evit an dazont

30 vloaz, 3000 skoliad, 320 implijad, 100 den gopret gant Diwan. Budjed 2007 : 3 023 458 euro. Chom a ra da gavout 80 000 euro, evit dont a-benn da vont war-raok ha da gas war-raok he c'hefridi : derc'hel d'ur skol divyezhek dre soubidigezh, laik, digoust evit ar vugale ha digor d'an holl ha derc'hel d'he raktresoù digeriñ da nebeutañ div skol nevez ar bloaz hag ur skolaj e Liger-Atlantel. Kerkent ha resevet ho chekenn e vo kaset deoc'h dindan ur sizhun ar skrid testeni evit an tailhoù. Evit 100 euro roet da Ziwan e c'heller lemel 66 euro diwar an tailhoù. Bec'h dezhi eta !

Deuit da greskiñ niver an dud a skoazell Diwan ingal : ouzhpenn 3 200 hiziv. Evit kavout 120 000 euro emarc'hantañ ouzhpenn ar bloaz ez eo trawalc'h da 1 000 den divizout reiñ 10 euro bep miz (3,40 euro goude an digoll tailhoù).

Diwan

UR SKOLAJ DIWAN E BRO-NAONED ?

E miz Here 2007 e oa bet votet gant Kuzul Merañ Diwan digeriñ ur skolaj e Naoned e miz Gwengolo 2008. Diazezet e oa an diviz-se war labour ur skipailh kerent efedus hag ivez war un arouez : abaoe meur a vloaz e oa deut da vezañ dibosupl krouiñ skolioù divyezhek e Liger-Atlantel, koulz en deskadurezh Stad hag en deskadurezh katolik. Kinnig digeriñ ur skolaj a oa diskouez youl Diwan da stagañ Bro-Naoned ouzh Breizh ha youl ar vrezhonegerien da zifenn o yezh e Liger-Atlantel.

Abaoe ez eo aet ar raktres war-raok, savet eo bet ar frammoù ret gant meur a gevredigezh sevenadurel eus Naoned, labouret ez eus bet gant ar C'huzul-departamant. Kudennoù a chom da ziluziañ c'hoazh, hini an ti, met chañsoù zo e vo kavet un diskoulm da c'hortoz evit adkrog-skol Gwengolo 2008, hag unan da vat da c'houde.

UR RAKTRES STANKET ABALAMOUR D'AN ARC'HANT

Ar raktres-mañ avat, forzh pegen solut e vefe, ne yelo ket betek penn, kazi-sur. Hiriv, ne c'hell ket Diwan paeañ ur skolaj nevez, hag e Bro-Naoned e vefe ! Keruz e koust ur skolaj, rak, abalamour da lezenn Debré, ez eo ret da zDiwan paeañ an holl gelennerien e-pad pemp bloaz d'an nebeutañ, a-raok ma vefent kemeret e karg gant ar Stad. Digeriñ ur skolaj a lakfe eta Diwan a-bezh en arvar.

Ar skouer-se a ziskouez splann kudennoù arc'hant Diwan. Goude meur a vloavezh hep raktres skol nevez, ez eus bet digoret skolioù e Pariz (2004), e Louaneg hag er Chapel-Nevez (2006) hag e Kastellin (2007). Evit Gwengolo 2008, ez eus 4 raktres da zont. Diskouez a ra ar sifroù-se ez eus ul lusk nevez gant Diwan ha gwel a se, rak pouezus eo evit dazont ar brezhoneg : e Kastellin, ne oa klas ebet o kinnig un deskadurezh e brezhoneg a-raok Diwan.

HA KROUET E OA BET DIWAN 30 VLOAZ ZO !

Koulskoude, ne c'hell ket Diwan derc'hel e-keñver an arc'hant ma vez krouet skolioù nevez. Ur wech ouzhpenn e rank Diwan goulenn skoazell ar Vretoned evit kempouezañ he budjed. E fin miz Here e vanke 87 000 euro evit klozañ budjed 2007. N'eo ket kalz e-keñver budjed hollek Diwan : nebeutoc'h eget 3 %. Trawalc'h eo koulskoude evit lakaat Diwan diaes. Ne vo ket Diwan en arvar war-eeun abalamour d'an toullig-se, met bez' e c'hell al lañs nevez bezañ torret ha diaes e vo degermer ar skolidi nevez.

DIAESTERIOÙ AR C'HELENN DIVYEZHEK

Er bloaz a zeu e vo serret postoù e-leizh gant an deskadurezh Stad. Hervez an FSU e c'hellfe bezañ serret etre 300 ha 400 post kelenner en Akademiezh (4 departamant). E peseurt stad e vo eta ar c'heleñn divyezhek ? Ha tu zo da grediñ ne vo ket gwallgaset gant seurt politikerezh ? Diaesoc'h-diaesañ eo dija digeriñ skolioù nevez gant Div Yezh ha Dihun. Evit ma kreskfe ar c'heleñn brezhoneg, ez eo ret e vefe kreñv Diwan. Evel-just e vez sikouret Diwan gant ar Rannvro ha gant an Departamantoù, met n'eo ket a-walc'h : bez' e rank Diwan kaout muioc'h a arc'hant drezi hec'h-unan. Evit an holl abegoù-se, e c'halvomp ar Vretoned da skoazellañ ac'hanomp en-dro, o kas chekennoù pe oc'h ober treuzvankadennoù.

Patrig Herve - Prezidant Diwan

An diouer a arc'hant o virout da ziorren

Follennoù skoazell war : www.diwanbreizh.org. Titouroù : 02 98 21 33 69